

CHANSON

COMPOSET GANT EUR PRISONNIER

Var sujet eur passage cruel deus i amzer a brison

PREMIER COUPLET

Ostaît compagnuez da zilaou eur chanson
Péhini zo compozet gant un den a galon,
Var sujet ar binijen a neus bet anduret,
Epad an amzer ma z'eo bet gant ar brussiannet.

DEUXIÈME COUPLET

Setu mé a teu brema ia gant cals a glahar
Da réi d'eoc'h an détaïl deus tud tyrant a barbar,
Mais aouenn a meus da vankout ma spéret so troublet,
Na hellin ket explique d'eoc'h ma foaniou tréménet.

TROISIÈME COUPLET

Mé o ped da sonet brema da zilaou eur momet.
A houi a glévo ganin ma mizer dréménet,
Parlanti a rin neuzé deuz ar bloaves séitec,
Gant eur galon constristet hag ivé quen guiriec.

QUATRIÈME COUPLET

Goudé béza gréat ganin trégont miz a brizon,
Ma halon a oa carguet a zezolation,
Pa teuer d'am désigna gant ar gouarnamant,
Da vonet da labourat d'indan ar bombardamant,

DIXIÈME COUPLET

Partiet a zoun breman a hent evit labourat,
A gant cals intention o fixent ma daoulagat.
Guélet réent dirazon tan an artillirie,
Pihini a vombardé linen an ennemie.

ONZIÈME COUPLET

Laquéat vijomp da ober a bep sorte labouriou,
A tout a meus o havet é vijent gouall divalou,
Kasset a digasset an eil tu d'égilé,
Plaçet vijomp créis an tan an danger o bué.

DOUXIÈME COUPLET

Chom é rachomp ouspenn-zé a face d'an oll amzer,
Hag o valé dré ar pri gant o zammou pouner,
Cals diouzomp a gouéza gant an naouenn semplet,
Pa né vijé da zibi kajé tammic abet.

TREIZIÈME COUPLET

Guélet a réomp bemdé an aréoplanet.
Péré a sonjé dézo a oamp prussiannet,
Téléphoni a rachont bétec an artillirie,
Péhini a réa déomp donet da non sispersi.

Mé o ped da sonet brema da zilaou eur momet.
A houi a glévo ganin ma mizer dréménet,
Parlanti a rin neuzé deuz ar bloaves séitec,
Gant eur galon constristet hag ivé quen guiriec.

QUATRIÈME COUPLET

Goudé béza gréat ganin trégont miz a brizon,
Ma halon a oa carguet a zezolation,
Pa teuer d'am désigna gant ar gouarnamant,
Da vonet da labourat d'indan ar bombardamant,

CINQUIÈME COUPLET

Conduet a oamp neuzé var douarou ar France,
Evit donet da gontanti fallenti an noblanç,
Péré a deus visquas dré ma zint galloudus,
Rentet dré o vissou cals a dud malévrus.

SIXIÈME COUPLET

Pa oamp diguoéset var ar place a oa d'eomp désignet,
E n'eur vélet o lojéis holl a oamp souézet,
Car ébars é un danten goloët gant paper,
E rancquomp donet neuzé da drémen o miser.

SEPTIÈME COUPLET

Sétu mé zo vonet brema d'am guélé da gousket,
Pa né neus ket évidon tam abet préparet,
Cousquet vijomp var ar pri gant o zammou pillou,
Ha éguis da benn vélé é vijé o boutou.

HUITIÈME COUPLET

An daélou am daoulagad, a gant an naon enduet,
Eno teué da sonj d'in deuz ma bro biniguet,
Péhini é moa quittaet aboué a bell amzer,
Evit donet d'an Allemagne da ober eur merzer.

NEUVIÈME COUPLET

Deus ar mintin pa zavomp gant ar boan izili,
A hachomp bétec an nos a nep tam da zibi,
Gant eur banahic dour tom da houelhi c bouellou,
E rancquomp monet neuzé da gleuza tranchéou.

Chom é rachomp ouspenn-zé a face d'an oll amzer,
Hag o valé dré ar pri gant o zammou pouner,
Cals diouzomp a gouéza gant an naouenn semplet,
Pa né vijé da zibi kajé tammic abet.

TREIZIÈME COUPLET

Guélet a réomp bemdé an aréoplanet.
Péré a sonjé dézo a oamp prussiannet,
Téléphoni a rachont bétec an artillirie,
Péhini a réa déomp donet da non sispersi.

QUATORZIÈME COUPLET

Aben eur pennad da houdé obusioù deus ar France,
A gouéza diouzomp a neubeut a zistance,
Monet a rachom neuzé péhini deuz i gosté,
Evi a non zavétéi buhana ma helché.

QUINZIÈME COUPLET

Pédi a réent neuzé guerc'hez vad ar zikour,
Da zonet d'am délivra digan va énébour,
Péhini réa d'in soufr cals a binijen,
O forci da labourat a énéb d'ar transijenn.

SEIZIÈME COUPLET

Deus an nos pa zigouézomp ébars ar varaquenn,
Prest a vijomp da sempli é n'eur vonet d'ar souben,
Péhini a vijé gréat, ia gant béttarabéz,
Mesket gant eun tam brenn hag ar peil patatez.

DIX-SEPTIÈME COUPLET

N'a n'eus quet var an douar mar karit tu komprenn,
Eur vuez quen misérable na tristoc'h planédenn,
Evit ma zéo eur prisonnier, evelt eun den condonnet,
Péhini a rancq senti deus i ennemiet.

CLAUDE PRIMEL,

au Kersaux, en Scrignac (Finistère).

Chanson eur Prisonnier d'éoc'h ar Bloavez 1914 da 1919

COMPOSET GANT EUR PRISONNIER

PREMIER COUPLET

Silaouit compagnuez chanson eur prisonnier.
A zo bet ébars an Allemagne o soufr cals a viser.
D'éoc'h ar bloavez pévarzec évit monet da naontec
E teuon da barlant d'éoc'h gant eur galon guiriec,

DEUXIÈME COUPLET

Epad mad amzer a brizon an dro da guer Verlin
A zoun bet alies mantrret gant ar jagrin
Dispartiet d'éoch ma zud quérent a mignonet
Conduet an esclavage, gant ar brussianet

TROISIÈME COUPLET

D'éoch an noz hag ar mintin, o var an déis aliez
Ma halon labour a rannè gant an dristidiguez
E n'eur vélet dirazon an amzer da zonet
Péhini é oa évidon carguet a grueldet.

QUATRIÈME COUPLET

Guélet é réent ouspen-zé ma buez tréménet
Hag é sonjenn er stat trist é péhini oant renjet.
Gousquet vijenn var ar plouz, gant eur gouverturenn
Hag éguis da benn vélé vijé ma muzettenn.

CINQUIÈME COUPLET

An daélou am daoulagad, o gant a laou dévoret.
Eno teué da sonj d'in d'éoch má bro biniguet
Péhini é moa quittaet, ia gant cals a ancquenn
Evit donnet d'an Allemagne d'a ober pinijen.

SIXIÈME COUPLET

D'éoch ar mintin ba savomp é vijomp rassamblé
Evit monet d'ar haffé, ia gréat gant ségual grillet.

DOUXIÈME COUPLET

Neuzé hachent d'ar guéguin, ia hant ma gammélen
Evit monet da guerhat eur banahic soubenn
Ar guéguin pa zigouézenn a vijen servijet
Henvel d'éoc'h eur muntrer bras d'ar maro condaonet.

TREIZIÈME COUPLET

Lod ahanomp vijé staguet, o ia d'éoc'h pillérou.
Evit donet do féa d'éoc'h o holl laboriou.
Eno henvel d'éoc'h Jésus pa oa crucifiet
Cals diouzomp a gouéza, gant an naouenn semplet,

QUATORZIÈME COUPLET

Mais ar prussian sauvage, hag ivè dinatur
A zellé d'éoc'h an drazé, ia gant cals a blijadur.
E n'eur vélet quément-zé a zézirenn mervel.
Pa sonjenn pénaos a oa ma buez quer cruel.

QUINZIÈME COUPLET

Laquéat m'oa bars ma spéret na hachen mui biquenn
D'éoc'h tré douarn miliguet ma brassa énébourienn.
Gant péré a moa da soufr o cals a dourmanchou
Hag an drazé réa d'in donet da scuilla daélou.

SEIZIÈME COUPLET

Implori a réent Doué d'éoc'h a greis ma halon.
Evit teuché da rei d'in i vénédition
Pédi réent anézan gant eur guir garanté
Evit béza délivret digant tud quem didruè.

DIX-SEPTIÈME COUPLET

Mé o ped da zonet-bréman d'ober intention
A boui a glevo ganin frico ma fansion.

Hag eulis da benn vele vije ma mazetenn.

CINQUIÈME COUPLET

An daéloù aim daoulagad, o gant a laou dévoret.
Eno teué da sonj d'in d'éoch má bro biniguet
Péhini é moa quittaet, ia gant cals a anquenn
Evit donnet d'an Allemagne d'a ober pinijen.

SIXIÈME COUPLET

D'éoch ar mintin ba savomp é vijomp rassamblet
Evit monet d'ar haffé, ia gréat gant ségual grillet.
Touchet a vijé ivé un tan bara bemdé
Péhini vijé lonquet abenn pemp munut goudé.

SEPTIÈME COUPLET

Abenn eur pennad da houdé vijé gréat an appel
Evit monet d'ar horvé gant eur hovet avel.
Conduet da labourat épad dec heur bemdé
Evel guéchall ar paysan gant an noblicité.

HUITIÈME COUPLET

Laquéat vijomp da ober a bep seurt laboriou.
A tout a meus o havet a vijenn guoal divallou.
Car dré ar glao ; an nerc'h, hag an douar skornet.
Vijomp kasset d'ar blénenn gant on ennemiet.

NEUVIÈME COUPLET

Eno évelt un ermit, o hober pinijen.
Vijen prest da bérissa, ia gant ar yénienn
Hoas a vijenn poursuivet gant ar gardianet
Péré a vijé ganté o fusuliou armet.

DIXIÈME COUPLET

Contant vijent da réi d'in a nep rémission
Mar teuchen da zizenti un tenn créis ma halon,
Car birviquenn am buez na vélén quen tyran.
Evelt ba vijé counaret an treitour prussian.

ONZIÈME COUPLET

Pa vijé sonnet an heur évit échui an dévez
Neuzé teonmp adarré, ia d'ar guer assemblez.
Am zantenn pa zigouézenn contant da reposi
E meus guélet aliez na mijé tam da zibi.

Hag eulis da benn vele vije ma mazetenn.

SEIZIÈME COUPLET

Implori a réent Doué d'éoc'h a greis ma halon.
Evit teuché da rei d'in i vénédition
Pédi réent anézan gant eur guir garanté
Evit béza délivret digant tud quem didruè.

DIX-SEPTIÈME COUPLET

Mé o ped da zonet bréman d'ober intention
A boui a glevo ganin frico ma fansion.
Quenta pred a moa débet oa ar macaroni.
Péhini a oa mesquet gant pâte an Itali.

DIX-HUITIÈME COUPLET

Mais kaouet réa dézo, oa an dré ré goustus,
Evi donet da véva ar paour quez malavéruz
Car abenn eur pennad da houdé, evit passéal ar gonté.
Vijé poazet brenn a hei, o ia diou véc'h bemdé.

DIX-NEUVIÈME COUPLET

Pa né quet mui a hét, nag ivé patatez.
Nezé teuont da rei d'omp tammou betterabéz.
Débet a meus a bep sorte hétec irvin skornet.
Car an nauenn a zo cri, mé o ped am hrédet.

VINGTIÈME COUPLET

Eyéruzament oa ganin, ma hamaled fidé
Péhini a zo hanvet Guillou an dirastel.
Sétur azé mignonet ma miser dréménet.
A mé deut adarré da gaouet évérustet.

VINGT-ET-UNIÈME COUPLET

M'ar karit-u donnet bréman d'ober réflexion
A tra-zur lavarféc'h d'in da zéo trist ar prison.
Ar zon-ma zo composet, ia gant eur prisonnier
Bé a zéo d'éoc'h a Vretagne, o chom er Finister.

CLAUDE PRIMEL,

au Kersaux, en Scrignac (Finistère).

Propriété réservée.

JOUAN PIERRE.